

YF_0067_Ar Verjelenn

kanet gant ar c'hoarezed Goadeg

Na ma 'c'h an me d'an arme e-giz ma kontan monet
Na pelec'h 'lakin me ma dous, o, berjelenn da viret?

O, digaset 'nezhi d'em zi, o, ma breur-kaer ma keret,
Me a lako 'nezhi e kambr, o, gant ma dimezelled.

Me a lako 'nezhi e kambr, o, gant ma dimezelled,
Peotramant 'barzh ar sal vras gant ma intronezed.

Na oa ket sortiet mat, nag e daou droad 'maez an ti,
Ma komansed e vreur-kaer, o, da ganan pouilh dezhi.

Na chetit ho prozig ruz hag hoc'h hini wenn mirit
'Vit ma 'c'h ehet (eot) d'al lanniou da vesan an derved.

-O, salokraz, emezi, o, me n'on ket kustumet
Na da vonet d'al lanniou da vesan an derved.

-A, ma n'hoc'h ket akustamet, kustuman 'ri pa po c'hoant
Aman 'zo ur walig wenn hag en deus daou pe dri brank,

Aman 'zo ur walig wenn hag en deus daou pe dri brank,
Honnezh a ray deoc'h monet, o na, goude po (pefe) ket c'hoant

Ar plac'hig paour-man a oa bet e-pad seizh vloaz o ouelan
Pa oa echu ar seizh vloaz hi a gomans da ganan.

O, pachig, pachig bihan o tistrein eus an arme
Ha me 'glev ur vouezh argant o kanan lein ar menez

Me a glev ur vouezh argant o kanan lein ar menez
Ha me 'garfe gou t hag-eh ur verjelenn e vefe?

-Debonjour dit berjelenn hag aman gant da zenved,
Penaos hoc'h eus, o, gallet ho konservin ken perfet?

-O, feiz ya sur, emezi, dre zrugarez Doue,
Kar an denjentil yaouank a zo aet d'in (diganin) d'an arme.

Kar un denjentil yaouank a zo aet d'in (diganin) d'an arme.
En doa ur blev melen blond hanval-bev ouzh da re....